

Kantik ar Skol gristen

*Le recueil de St Brune
l'a reproduit avec des
retouches*

Var don : **Kantik Lambader.**

DISKAN

Kanomp, kanomp da virviken
~~Menor~~ ha gloar d'ar skol gristen,
 D'ar skol a ra d'ar vugale { *bis.*
 Anaout ha karet ~~ho~~ Doue.

1

Pegen eürus ar parrezioù
 O deus dre nerz aluzennou,
 Savet, hervez ho liberte
 Skolioù kristen d'ho bugale !

2

Er skol gristen na vezint ket
 Skoliet evel ar baianed,
 Heb hano morse, hed ann deiz,
 Euz a Zoue nag euz ar feiz.

3

Er skol-ze, mistri, mestrezed,
 Sul ha gouel a za bepred,
 Gant kerent ha bugaligoù,
 D'an iliz, d'an oll ofissou.

4

Kement skol gristen zo digor
 A lak' kroaz Jezuz en henor,
 Araok ha goude labourat,
 Eno 'vez grêt eur beden vad.

5

Ar skol gristen d'ar vugale
 A zesk da genta hent an env
 Rak ar genta deskadurez
 Eo hent an env, ar zantelez.



6

Var ar marc'had e ro d'ezho
 Kement deskadurez a zo.
 Guelit! Guelit! tud dizoue.
 A gas d'ezho ho bugale!

7

Doue hon Tad, hor Mestr Karet,
 Skuilhit ho pennoz, ni ho ped,
 Var hor skol gristen, ma teuo
 Da zalc'her start ar feiz er vro.

8

Grit ma vo sentuz peb hini
 Ouz lezen striz an Eskopti
 Hag a lavar d'an oll gerent:
 Ho mab, ho merc'h er skol gristen!

9

Grit d'omp kompren er barrez-ma
 Pegen diez eo grizienna
 E kalon dinam ar bugel
 Ar feiz, ar vertuziou santel.

10

Grit d'ar gerent kompren ervad
 Eo da genta d'ar vamm, d'an tad
 D'ar vamm dreist-oll, var he barlen,
 Deski d'ar bugel he bedon.

11

Pellañ diouzomp ar wall-skueriou
 Ar skridoù fall, ar wall gomzou,
 Labour euzuz an drouk-spered,
 An dud difeiz ha dizakret.

A. C.

